

**SKOL-VEUR BREVEZ EUROPAT SKIANTOÙ
KLAÑVDIOURIEZH - ULESI**
Kevredigezh 1901 hep pal arc’hantus
Diorroadur personel, micherel, aozadurel
Niv. vroadel stummerezh dibaouez 11 921105992
Niv. Rukad 324 081 827 00036 Ope 804D
e ti **Marie-Thérèse BAL-CRAQUIN**
7, avenue Marcel Martinié 92170 VANVES
Pgz : 09 50 90 95 14
info@ulesi.fr <http://www.marie-therese-bal-craquin.fr>

Perzh an denesadurioù treuzremziadel, reizhiadek ha fenomenologek er yec’hed hiniennel ha stroll

Marie-Thérèse BAL-CRAQUIN

Prezegezenn ar Sul 7 a viz Mezheven 2009
e-pad IV^e Kendalc’h Etrebroadel ar SIDIIEF eus ar 7 betek an 11 a viz Mezheven e Marrakech

Abaoc’h tregont vloaz zo ne c’haller nemet stadañ e c’hall un toullad mat a ersavioù, a gleñvedoù korf ha bred, a emzalc’hioù bezañ bet da hêrezh digant hon hendadoù. E-touez ar ersavioù-se, ar c’hudennoù yec’hed a sell ouzh tachenn arbennigiezh difer ar c’hlañvdiourezed⁽¹⁾.

An div hentenn bennañ a ro an tu da labourat war hêrezh an treuzremziadoù zo ar vredlignezouriezh⁽²⁾ hag ar steredegoù⁽³⁾.

Emaon o vont da gomz, e berr gomzoù, diwar-benn ar vredlignezouriezh a zo kalz anavezetoc’h⁽⁴⁾ eget an denesadur a reer ar “steredegoù” anezhañ. Gant ar ger barzhonius-se ez eus c’hoant da ziskouez he deus pep furm buhez en hollved ur plas dibar evel ar stered⁽⁵⁾ !... Padal, er c’hosmoz, ma ne vefe ket mui ur steredenn en he lec’h e vefe gwallreuzus. Pa ne vez ket ur « furm buhez », ha pa vefe Mab-den, eus ar rizhell d’ar c’hoziad, en ur reizhiad, familh pe strollad denien, ez eo ur gwallreuz. Gant gerioù gouiziek e vez graet eus an emell-se war ar reizhiad⁽⁶⁾ a reer “steredegoù” anezhañ : “Denesadur fenomenologek ha reizhiadek adsavlec’hiañ familhoù hag embregerezhioù”⁽⁷⁾

-
- (1) BAL-CRAQUIN, Marie-Thérèse *"Comment et pourquoi initier une démarche éducative ? Prezegenn eus an 3 a viz Gouere 2003 d’an danvez Klañvdiourien(ezed) e Bar-Le-Duc"*. A c’haller lenn e www.infiressources.ca
- (2) ANCELIN SCHÜTZENBERGER, Anne *"Aïe, mes aïeux !"* Embannadurioù La Méridienne/Desclée de Brouwer, Pariz, 2000, 254 pajenn.
- (3) MANNÉ, Joy *"Les constellations familiales : Intégrer la sagesse des constellations familiales dans sa vie quotidienne"* Embannadurioù Jouvence, Frañs, 2005, 95 pajenn.
- (4) PHANEUF, Margot *"Communication, entretien, relation d'aide et validation"* Embannadurioù Chenelière/McGraw-Hill, Montréal, 2002, 634 fajenn. El levr-mañ e ro an oberourez titouroù mat evit gouzout penaos implijout genogramm "binvioù" ar vredlignezouriezh, pajennoù 513 ha war-lerc’h.
- (5) REEVES, Hubert *"Poussières d'étoiles"* Embannadurioù Seuil, Dastumad Points Sciences, Pariz, 1988, 252 bajenn.

Pal an eil hentenn pe eben eo dieubiñ an dud hag ar reizhiadoù diouzh al liammoù a strafuilh anezho evit reiñ tro dezho da sevel liammoù a zieub, en ur zoujañ d'o ekoreizhiad.

Tra ma ra ar vredlignezouriezh gant ar poellata, klask ar fedoù, arvezioù anaoudel an hinienn dreist-holl e tigor denesadur ar steredegoù tachennoù dianav d'an diemouez denel ⁽⁸⁾, hiniennel ha stroll. Un hentenn eo hag a zeu eus an Henamzer : da vare ar pobloù kentañ, p'en deveze un den kudennoù liammoù, pa ne veze ket en e vennad ober tra pe dra pe p'en deveze darempredoù trubuilhet gant an hentez e veze bodet gant ar re gozh ur strollad tud a-youl vat, e veze graet ur c'helc'h, an "*dachenn a oar*", hag e diabarzh an dachenn-se e tiskouezent elfennoù ar gudenn pe e vefent denel pe e vefent arouezel. Da c'houde e veze lezet an "diskouezerien" da gompren ar pezh a zeue hag e veze stadet penaos ma veze eztaolet da gentañ ar gudenn pe ar c'hudennoù gant an dilec'hiadennoù hag ar pezh a sante an diskouezerien, da eil e teue an diskoulm en un doare naturel. An argerzh a c'hane ar pareañ. Heñvel eo hiziv.

Da Virginia SATIR ⁽⁹⁾ eo dleet an denesadur addizoloet er bloavezhioù 1970. Implijout a rae anezhañ e-barzh an derapiezh tiegezhel reizhiadel ⁽¹⁰⁾ a oa bet unan eus an arbennigourezed kentañ warni. E Kalifornia e oa Virginia SATIR d'ar mare ma komañse an dud da lakaat henvoazioù ar pobloù kentañ war wel. Tiriad an Amerindianed e oa Kalifornia. Hervez ar vojenn e oant bet anvet "Angelo". Setu perak e reer anv eus Los Angeles. Suroc'h eo lavaret e oa bet roet an anv-se dezho gant misionerien hag o doa avielet ar c'horn-bro-se. Goude-se e oa bet frammet denesadur ar steredegoù gant Bert HELLINGER ⁽¹¹⁾, ur beleg alaman, misioner eñ ivez, hag a oa karget eus ur skolaj bras e Suafrika. Awenet e oa bet gant hentennoù pareañ an Afrikaned, hentennoù tost d'ar pezh a vez addizoloet e Kalifornia.

Tri luskad steredegour zo anezho bremañ, ar re a zo stag ouzh ar skol reizhiadel (12), ar re a zo stag ouzh ar skol fenomenologek (13) hag ar re a vez awenet gant anv div skol. Lodenn on eus ar re ziwezhañ kentoc'h.

(6) GRÜN, Anselm "*Management et accompagnement spirituel*" Embannadurioù Desclée de Brouwer, Pariz, 2008, 270 pajenn. Er pennad 5 eus al levr-se e tispleg an oberour, ur beneadad anavezet-mat anezhañ, hentenn ar steredegoù reizhiadel hag he zalvoudegezh evit diorren ar "yec'hed" ha pareañ an darempredoù en embregerezh, ar pezh a c'hall broudañ ac'hanomp da lakaat war-sav pleustroù yac'h evit an ospitalioù, pajenn 181 hag ar re war-lerc'h.

(7) HELLINGER, Bert ; TEN HÖVEL, Gabrielle "*Constellations familiales*" Embannadurioù Le Souffle D'Or, Frañs, 2001, 210 bajenn.

(8) GROF, Stanislav "*Royaumes de l'inconscient humain*" Embannadurioù Le Rocher, Dastumad L'esprit et la matière, 1992, 288 pajenn.

(9) SATIR, Virginia "*Pour retrouver l'harmonie familiale*" Embannadurioù Skol-Veur, Pariz, 1980, 306 pajenn.

(10) SATIR, Virginia "*Thérapie du couple et de la famille*" Embannadurioù Desclée de Brouwer, Pariz, 1995, 251 bajenn.

(11) HELLINGER, Bert "*La maturité dans les relations humaines*" Embannadurioù Le Souffle D'Or, Frañs, 2002, 231 bajenn.

N'eo ket kreizet ar steredegoù war kudennoù an amzer dremenet hepken, pell alese. O fal eo dreist-holl lemel ar bec'h diwar ar reizhiadoù tiegezhezhioù, kumuniezhioù pe embregerezhioù eus ar "bredklañvadurioù", an torradurioù liammoù pe savadurioù liammoù miarc'hwelel ⁽¹⁴⁾.

Ma c'hall hor buhez bezañ lakaet diaes, betek ar c'hleñved, abalamour d'ar c'hudennoù a vremañ pe d'ar c'hudennoù treuzremziadoù, **gant petra e c'hall ur reizhiad bezañ lakaet klañv hag, evel-just, un den er reizhiad ?**

1/ An ezlakadurioù

2/ Ar mallozhioù

3/ Digempouez an eskemmoù

4/ Ar c'henweadurioù

5/ An nann doujañs da lezennoù ar vuhez

6/ An dizurzhioù

7/ Strafuilhoù ar reizhiad tost

8/ Ar paradigmoù (doareoù soñjal) gwallreuzus

1/ **An ezlakadurioù.** Unan eus ar reolennoù merzet pa zielfenner al lignezouriezhioù eo ez eo tonket kement tra a zo ezlakaet (yezh, bro, relijion, ideologiezh, donezonoù arzel pe kefredel, tud, bugale, ha kement zo) da vezañ ad-enlakaet daou pe tri remziad diwezhatoc'h. Bez' eo, etre traoù all, kudennadur ar sekredoù ⁽¹⁵⁾. Kalz a zoareoù ezlakaat zo e kudennadurioù ar c'hañv, ar c'hudennadurioù deuet diwar taolioù dianzavus, ar gwadserc'hoù, ar ganedigezhioù anpriedel, an avoultradennoù, an emlazhoù, ar muntroù, ar c'hondaonidigezhioù gant ar justis, ar c'hleñvedoù bred, kleñvedoù zo evel an dorzhellegezh, an alkoolegezh, ha kement zo. Kement tra n'eo ket liammet ouzh un dra anzavet, un dra lavaret, un dra n'eus ket bet lakaet un anv warnañ a zo war riskl da genderc'hel er reizhiad tiegezhezhioù pe embregerezhioù e stumm un "tasmant" ⁽¹⁶⁾, un "dizurzh displann".

An doare da bareañ an ezlakadurioù zo addegemer ar pezh a zo bet ezlakaet, da nebeutañ, en ur stumm arouezel.

2/ **Ar mallozhioù.** "Lavaret traoù drouk" diwar e benn e-unan pe diwar-benn unan bennak a laka war hir pe hiroc'h termen da eztaoliñ en e gorf "traoù fall da lavaret" ⁽¹⁷⁾, en e gorf pe en hini e ziskennidi. "Mallozhiñ" a reer unan bennak en ur lavaret dezhañ pe ur lakaat anezhañ da santout : *"te zo kaoz ma'z on bet dimezet da'z tad" "Ma ne vijes ket bet ganet em bije graet berzh em micher" "ma'z eo aet da dad kuit ez eo abalamour dit" "Evel da eontr out, eveltañ e vi kaset da di ar re foll"*

⁽¹²⁾ POTSCHKA-LANG, Constanze *"Constellations familiales : guérir le transgénérationnel"* Embannadurioù Souffle D'Or, Dastumad Chrysalide, Frañs, 2001, 283 fajenn.

⁽¹³⁾ SINGER, Christiane *"Éloge du mariage, de l'engagement et autres folies"* Éditions Albin Michel, Pariz, 2000, 132 bajenn.

⁽¹⁴⁾ WEBER, Gunthard ; HELLINGER, Bert *"Les liens qui libèrent"* Éditions Grancher, 1998, 321 bajenn.

⁽¹⁵⁾ NACHIN, Claude *"À l'aide, y a un secret dans le placard !"* Éditions Fleurus, Pariz, 1999, 200 pajenn.

⁽¹⁶⁾ DUMAS, Didier « *L'Ange et le Fantôme: Introduction à la clinique de l'impensé généalogique* » Embannadurioù Minuit, Dastumad Arguments, Frañs, 1985, 179 fajenn.

⁽¹⁷⁾ BIGÉ, Luc « *Petit dictionnaire en langue des Oiseaux : Prénoms, Pathologies et Quelques Autres* » Embannadurioù Janus, Dastumad Systèmes du Monde, Frañs, 2006, 240 pajenn.

ha neuze, da gentañ, n'out ket ur bugel c'hoantaet" pe, un doare all "*ur gwallzarvoud eo* » en ur gomz

diwar-benn ur bugel (Ne vez ket koñsevet ur bugel dre wallzarvoud gwech ebet, ur c'hevrin eo : ar vuhez he deus choazet ar gerent-se evit ma teufent da vezañ tud ar bugel-se) pe pa'z eus bet ur gwallzarvoud ma'z eus marvet ur bugel, lavaret d'ar bugel chomet bev : « *kavet em bije gwelloc'h e vefe te a vije marvet*"... ha kement doare mallozhiñ all. Kavout a reer kalz a vallozhioù er c'hudennadurioù pa vez tost an dud an eil d'egile pe pa vezont dibriedet, trawalc'h eo ober anv eus an dispartioù ! Un doare mallozhiñ soutil zo lavaret d'ur bugel kement a draoù drouk diwar-benn e dad pe e vamm ha ma ne c'hall al lodenn anezhañ a zeu diwar an tad pe ar vamm "milliget" nemet bezañ bevet evel un droug mik. Gant an doareoù mallozhiñ-se e vez lazhet bugale ⁽¹⁸⁾ hag ul lodenn vras eus labour ar steredegoù zo tremen eus ar mallozhioù d'ar bennozhioù, da lavaret eo lavaret un dra a zegas mad d'e heul. Evel ma kinnig Luc BIGÉ ⁽¹⁹⁾ : Mont eus un dra bennak fall d'ar pezh en deus c'hoant an ene.

**An doare da bareañ ar mallozhioù zo tremen eus ar mallozhioù d'ar bennozhioù ⁽²⁰⁾
... evit-se e rankomp bezañ gallet ezteuler an displijadur eus ar c'holl evit dont a-benn.**

3/ **Digempouez an eskemmoù** zo unan eus ar mammenoù diaesterioù er reizhiadoù tiegezhioù hag embregerezhioù. Da skouer : lakaat an dud da labourat hep paeañ anezho pe o korvoñ anezho, bezañ dastumet danvez diwar un trafikerezh sklaved ⁽²¹⁾, tennañ e vad eus madoù dibourc'het ⁽²²⁾. Peotramant en ur familh en em ouestl unan eus ar vugale da zesevel ar re all ; pa varv un den en deus kavet gwelloc'h dilezel madoù da unan eus ar vugale war-goust ar re all (an hêr eo a riskl ar muiañ). Enoret eo an eil, dizoneret egile. En ur c'houblad, unan a labour, egile ne ra ket hag ar pezh a vez graet gantañ pe ganti er gêr n'eo ket anavezet evel un dra dalvoudus. En ur c'houblad, an eil en deus kalz diplomoù skol-veur hag egile n'en deus tra ebet. Ur makro digempouez eskemmoù a ya d'e ober an digempouez a zo etre ar madoù a gaver e hantervoul norzh ar blanedenn hag ar re a gaver en hantervoul su, gwelet a reer ar gwall reuzioù a vez degaset gant an dra-se.

An doare da ober war-dro digempouez an eskemmoù eo adkempouezañ, ar pezh a vez tener d'ober alies peogwir ez eo diaes « dresañ an traoù » pa'z eus bet tennet kalz a vadoù eus kerzh un den. N'eus nemet gwelet ar c'hudennoù a sav pa vez lezet madoù gant tud war-lerc'h o marv ha pa vez rannet ar madoù etre an hêred. Met ar priz da baeañ eo evit ma vo dizleet ⁽²³⁾ ar reizhiad tiegezhez. Pouezañ a ra kalz war ar remziadoù da zont. Heñvel eo e makroekonomiezh.

⁽¹⁸⁾ VAILLANT, Maryse "*Il m'a tué*" Emannadurioù La Martinière, Pariz, 2002, 284 fajenn.

⁽¹⁹⁾ BIGÉ, Luc "*Petit dictionnaire en langue des Oiseaux : Prénoms, Pathologies et Quelques Autres*" Embannadurioù Janus, Collection Systèmes du Monde, Frañs, 2006, 240 pajenn.

⁽²⁰⁾ GRÜN, Anselm "*Vous êtes une bénédiction ?*" Embannadurioù Salvator, Frañs, 2006, 157 pajenn.

⁽²¹⁾ PÉTRÉ-GRENOUILLEAU, Olivier "*L'argent de la traite : Milieu négrier, capitalisme et développement : un modèle*" Embannadurioù Aubier, Frañs, 2009, 418 pajenn.

⁽²²⁾ ROSNAY, Tatiana de "*Elle s'appelait Sarah*" Embannadurioù LGF, Dastumad Lennegezh estren, Frañs, 2008, 403 pajenn.

⁽²³⁾ CANAULT, Nina "*Comment paye-t-on les fautes de ses ancêtres : L'inconscient transgénérationnel*" Embannadurioù Desclée de Brouwer, Pariz, 2007, 167 pajenn.

4/ **Ar c'henweañ.** Dont a ra peurliesañ eus ar c'hudennoù a oa bet a-raok. Ur c'henweadur eo ar blegenn m'en em gav un den pa vez anavezet gant un den all : un hendad, ur bugel marv, ur bourev, ur reuzied, un den dianket, ur gwallzarvoudad, ur gwallzarvoud, un haroz, ur bredklañvour, ur gevell marv, ha kement zo. Evel ma weler e c'hall ur c'henweadur bezañ e orin e diankadenn nann anavezet un den bennak, ha gant-se ne c'haller ket ober kañv dezhañ. En degouezh-se en em ren an den kenweet en un doare iskis evitañ e-unan hag evit ar re all, evel m'en em gargfe da vevañ ar pezh a oa bet bevet gant egile, da ziskouez perak e oa bet milliget, ezlakaet, dizenoret pe perak ne oa ket bet anaoudegezh-vat en e geñver. Kement-se a c'hall mont d'ober ar pezh a anver personelezhioù lies. Kenweadurioù a gaver a-dreñv ar bredkleñvedoù pounner evel ar skizofreniezhoù (kenweadur gant unan eus ar vuntrerien pe gant meur a hini), ar vaniadiwaskadenn (kenweadur etre ur reuzied pe meur a hini hag ur bourev pe meur a hini), ar melkonioù (kenweadur gant ur gevell marv ⁽²⁴⁾, gant ur rizehell varv zoken). Labour ar steredegoù zo unan eus an nebeud labourioù a ro tro da labourat war ar plegennoù-se.

An doare da ober war-dro ar c'henweañ a dalvez kement ha kavout an den eur kenweet gantañ ha dre hanterouriezh un dileuriad rentañ dezhañ ar pezh ez eus bet kredet rankout dougen en e lec'h... dre garantez, met n'eo ket deomp.

5/ **Nann doujañs da lezennoù ar vuhez.** Evit ma c'hall ar vuhez diorren ez eo ret kaout un toullad lezennoù. Lezennoù ar fizik, ar vevoniezh, ha kement zo, int. Al lezennoù etik, divezel int ivez. Ne anavezomp ket an holl lezennoù-se, met gant ar glad sevenadurel o deus lezet hon hendadoù ganeomp e c'hallomp tostaat dezho. Diazez lezennoù ar vuhez, ouzhpenn al lezennoù deuet eus ar fizik, ar vevoniezh, ha kement zo, zo : *"Na ra ket d'an hentez ar pezh na'z pefe ket c'hoant e rafe dit."* Pa ne vez ket doujet da unan eus al lezennoù-se ne vezer ket kastizet ⁽²⁵⁾, e c'houzañver heuliadoù an nann doujañs-se. Da skouer : M'en em daol un den bennak eus eizhvet estaj un tour e varv. N'eo ket "kastizet", gouzañv a ra heuliadoù unan eus lezennoù ar vuhez ha n'eus ket bet doujet dezhi : ar pounnerder. Gallout a ra, evel-just, kaout abegoù dre ma n'en doa ket doujet dezho ! Ma lazhet un den bennak un den bennak all, en ur gwallzarvoud karr, ha pa ne vefe ket kiriek d'an dra-se, n'eo ket kastizet, met gouzañv a ra an heuliadoù. Hag an heuliadoù-se zo ez eus ul liamm a donkadur bremañ etre e familh ha familh an den bet lazhet. War a seblant, pe en defe lazhet un den a-ratozh-kaer pe n'en defe ket, en em laka war var hag e laka e dud kar-nes war var veur a remziad abalamour d'an heuliadoù a c'hallfe bezañ.

Al labour treuzremziadoù n'eo ket ul labour, e gwirionez, evit adlakaat an urzh diveizek war e reizh, met un denesadur hag a ro tro da sammañ kement ha ma c'haller heuliadoù e daolioù evit chom hep bezañ gwazh eus an dra-se e-unan pe en e ziskennidi ⁽²⁶⁾ : ar vugale, ar vugale-vihan, ar vugale-guñv, ha kement zo. A-benn nebeut ez an da resisaat penaos e teuer da vezañ hêr d'e hendadoù.

(24) AUSTERMANN, Alfred Ramoda *"Le syndrome du jumeau perdu"* Embannadurioù Le Souffle d'Or, Dastumad Constellations Familiales, Frañs, 2007, 292 pajenn.

(25) GRÜN, Anselm *"Qu'est-ce que j'ai fait pour mériter ça ?"* Embannadurioù Desclée de Brouwer, Pariz, 2006, 191 pajenn.

(26) RIALLAND, Chantal *"Cette famille qui vit en nous"* Sturlevr pleustrin ar vredlignezouriezh, Dastumad Marabout, Embannadurioù Robert Laffont, Pariz, 1994, 250 pajenn.

An doare da ober war-dro an nann doujañs da lezennoù ar vuhez a zo anavezout o heuliadoù ha sammañ anezho, dresañ anezhañ zoken, evit ma ne zeufent ket da vezañ mallozhioù el lignez.

6/ **An dizurzhioù.** Diskouez a ra ar reizhiadoù familhoù hag embregerezhioù o deus un urzh bennak. Evel-se e teu ar re goshañ a-raok ar re yaouankañ. Ar gwaz zo en tu dehoù d'ar vaouez hag ar vugale en tu kleiz da hounnezh... Dont a ra an dizurzh pa ne vez ket un den el lec'h ma tlefe bezañ. Da skouer, dre m'o deus dibriedet he zud an eil diouzh egile e kred ar verc'h henañ eo rediet da ober evit he zad e-keñver he mamm. Bez' eo unan eus abegoù heñvelrevelezh ar merc'hed hag ur blegenn dic'hoanag evit a sell ouzh ar revelezh. Skouer all : ur grennardez bennak a oa klañv gant an disnaon hag ar gournaon betek an deiz ma adlaka he zud ur bugel diforc'het er steredeg, liammet eo kement-se war-eeun ouzh he renk e-touez bugale ar c'houblad. Skouer all, Goude m'en doa divizet ur c'houblad diforc'hañ diwar ur bugel ez eas ar vaouez da vevañ gant ur pried all he doa bet tri bugel gantañ. Krediñ a rae an "trede" bugel kemer plas an hini bihan marvet, e vreur pe e c'hoar henañ, a zo liammet outañ dre m'eo ar pevare bugel eus tu e vamm. "Gotegad" eo, en em vuturniañ a ra, gwazh eo eus ar re all muioc'h eget bezañ bourev, nemet ez emhevelebf e ouzh ar re o deus "lazhet" e lezvreur henañ, gwaz kentañ e vamm hag hounnezh. En degouezh-se e teu da vezañ draster, taer, ha lazher zoken. Gant ar steredegoù e c'haller sortial eus an hentoù-dall a c'hall bezañ ken grevus ha ma kasont an dud "dilec'hiet" d'an ospital psikiatrek, d'ar prizon, pe er straed evel tud hep ti nag aoz.

Gant adsevel ar reizhiad hag an doare m'eo taolennet e c'haller lakaat an urzh en e reizh, aesaat ar stennadurioù, ha pareañ ar c'hlañvadurioù degaset gant an dizurzhioù zoken.

7/ **Strafuilhòù ar reizhiad bezañ tomm ouzh unan bennak**⁽²⁷⁾. Lavaromp, e berr gomzoù : "*Ar bezañ tomm ouzh unan bennak eo ar ret bevedel m'emañ an holl vevien da grouiñ nested gant ur boud all*". Korfel eo an nested da gentañ, ha goude-se, gant Mab-den, e teu da vezañ arouezel. Ar reizhiad bezañ tomm ouzh unan bennak zo peder fazenn bennañ enni : an darempred, derc'hel al liamm, an disheñveliñ hag ar c'hañv. Ma vez torraturioù re vras er pazennoù-se e c'hall an den stroñset kaout kudennoù hiniennel pe treuzremzadiel hag a denn d'ar steredegoù. Da skouer : gwech ebet ne zeuas ur vaouez e-barzh goude ma oa marvet he gwaz er brezel 14/18. Pevar remziad diwezhatoc'h ne zeu ket he merc'h-kuñv da sevel tiegezh. Bewech ma teu a-benn da gomañs da zaremprediñ ur paotr e tilez anezhañ, evel ma kasfe anezhañ d'ul lec'h all. Diskouez a reas he steredeg e oa o klask ur gwaz evit e vamm-guñv ha ne oa ket eviti. Skouer all : ur paotr en deus santet e oa unan bennak o vountañ warnañ dindan un tren evit e lazhañ. Adtapet e oa bet ku-ha-ka gant ar veajourien all ha den ebet, e gwirionez, n'en doa bountet warnañ. Marvet e oa gevell an dense⁽²⁸⁾ pa oa e vamm e trede miz he brazeded. N'en deus gallet en em zisheñveliñ diouzh ar bugel marv abalamour ma ne c'halle ket mui komz eus e fromadennoù hag ober e gañv dezhañ, ouzhpenn-se e oa ganet pa veze e vamm o tougen kañv d'ar

⁽²⁷⁾ BAL-CRAQUIN, Marie-Thérèse "*Attachement, séparations, deuils, dépressions : ouvertures transgénérationnelles. Conférence du vendredi 5 octobre 2007 à Déols*". Gallout a reer kavout anezhi el lec'hienn www.infressources.ca

⁽²⁸⁾ AUSTERMANN, Alfred Ramoda "*Le syndrome du jumeau perdu*" Embannadurioù Le Souffle d'Or, Dastumad Constellations Familiales, Frañs, 2007, 292 pajenn

bugel all. Kement-se en deus strafuilhet an darempredoù a oa etre hounnezh hag eñ. Deuet e oa ar bugel marv da vezañ evel un tasmant gourdrouzus. Gant lakaat anezhañ en ur steredeg e oa bet gallet reiñ un anv d'ar bugel marv, lakaat anezhañ en e lignez, bennigañ anezhañ e sevenadur e hendadoù hag an azoniad a c'hourdrouze ar gevell chomet bev a oa aet da get. Fiziet e oa bet an degouezh-se ennomp gant ar Psikiatr.

Gallout a ra ar steredegoù liammañ an den ouzh an darvoud traomatek, dezhañ d'en em zizober anezhañ.

8/ **Ar paradigmoù gwallreuzus.** Doareoù soñjal int na c'hallont nemet kas an traoù d'ar gwashañ. Evit lavaret an traoù e berr e c'hallfe un den hag a lavar dezhañ e-unan : « *Pa'z eo bet spontus ma amzer dremenet ne c'hall ma amzer vremañ nemet bezañ fall ha ma amzer da zont gwashoc'h c'hoazh !* » bezañ staliet evel ur mailh war arz ar gwalleur ⁽²⁹⁾ met diaes e vo dezhañ degemer e vuhez evel un eurvad. Heñvel dra eo evit an dud a gred dezho ez eo an droug a reer dezho a laka o anken vras pe o stres da sevel. **N'eo ket an droug a zo bet graet deoc'h a laka ho kwalleur da sevel, met ar pezh a rit anezhañ.** ⁽³¹⁾

An doareoù soñjal a zegas ar gwalleur zo da vezañ adlabouret warno dre gaer gant an dud a gred ez int gwir, ne reont ket a-ratozh-kaer.

Sevel a reer ar goulen-mañ bremañ : Penaos e "heriter" eus e hendadoù ?

An dra gentañ a stader eo e heriter eus e hendadaoù **en ur lammat ur remziad.** Ho pugale a herit muioc'h eus ho tud deoc'h-c'hwi eget ac'hanoc'h. P'o deus tapet an dud-kozh traomaoù hep gallout "bevelaat" anezho ("danzen" a lavarfemp) e ouzer dre skiant-prenet e klask ar gerent kompren an traoma dre ar psikologiezh hag e somateka ar vugale anezhañ e stumm strafuilhoù grevus pe c'hrevusoc'h hag a c'haller pareañ mui pe mui dre ar mezegañ, en o zouez ar bredkurañ ⁽³²⁾. N'eo ket tonket ha pep remziad en deus e labour diorren ha dreist-holl treuzfurmañ ⁽³³⁾ da seveniñ.

Setu un nebeud skouerioù : n'eo ket ral gwelet ur bugel o tougen kounnar e dud-kozh, hini e zud-ioù zoken, da lavaret eo tud e dud-kozh, ar pezh a c'hall disoc'hañ war strafuilhoù hepatek ⁽³⁴⁾

⁽²⁹⁾ WATZLAWICK, Paul "*Faites vous-même votre malheur*" Embannadurioù Le Seuil, Dastumad Seuil Humour, Frañs, 1990, 119 pajenn.

⁽³⁰⁾ FILLIOZAT, Isabelle "*L'alchimie du bonheur*" Embannadurioù Dervy, Frañs 1992, 300 pajenn.

⁽³¹⁾ PRADERVAND, Pierre "*Plus jamais victime : victime ou responsable, je choisis*" Embannadurioù Jouvence, Genève, 2001, 96 pajenn.

⁽³²⁾ ANCELIN SCHÜTZENBERGER, Anne ; DEVROEDE, Ghislain "*Ces enfants malades de leurs parents*" Embannadurioù Payot ha Rivages, Pariz, 2004, 179 pajenn.

⁽³³⁾ SINGER, Christiane "*Du bon usage des crises*" Collection Espaces Libres, Embannadurioù Albin Michel, Pariz, 2005, 147 pajenn.

⁽³⁴⁾ SELLAM, Salomon "*Origines et prévention des maladies*" Embannadurioù Quintessence, Frañs, 2003, 350 pajenn.

allergiezhioù na c'haller ket displegañ, un diabet (dizemglev etre div vamm-gozh). Gallout a ra ar sklerozoù strewek klotañ gant ur « stourm d'ar marv » e lignez ar wazed. Klotañ a ra seurtoù disnaon zo gant lazhadegoù hag a c'hall lod anezho sevel da Zispac'h Bras 1789 ! An dishadennadoù a vez alies ersavioù paouez ar vuhez abalamour d'ar riskl a varv ⁽³⁵⁾. Komzet hon eus diwar-benn ar maniadiwaskadennoù hag ar skizofreniezhoù dija.

Heritañ a reer eus e hendadoù **hervez e renk er breuriad**, an holl engehentadurioù (kolladennoù, diforc'hioù, speriadurioù in vitro c'hwitet, brazedded ezkrozhel) a seller outo evel ma c'hallfent kaout o flas. Da lavaret eo diboell aozañ « toulloù » er breuriad evel ma vefe an traoù evit ar mammoù-dougen ! Diskouez a ra ivez pegen grevus eo kemer divizoù zo evel digreskiñ an niver a rizhelloù.

1	2	3
4	5	6
7	8	9

Ar bugel henañ a gemer e blas e lignez an tad. Ur c'hloazadenn "c'hrevusoc'h" eo koll ur bugel henañ evit an tad eget evit ar vamm e kement ha ma'z eo ur c'hloazadenn en e lignez. En un doare arouezel ez a ar bugel henañ d'ober diazezoù an ti. Dedennet eo muioc'h gant e dadoù-kozh eget gant e dud.

An eil bugel (2) a gemer e blas e lignez ar vamm. Ur c'hloazadenn "c'hrevusoc'h" eo koll un eil bugel evit ar vamm eget evit an tad e kement ha ma'z eo ur c'hloazadenn en he lignez. En un doare arouezel ez a an eil bugel d'ober mogerioù an ti (ur bugel eus an diabarzh eo, o vezañ m'eo ar bugel kentañ ur bugel eus an donderioù) ha dedennet eo gant e dud. Gouzañv a ra muioc'h an eil alies pa zizimez e dud eget ar vugale all.

An trede bugel (3) eo bugel ar cheñchamant. Ret eo dezhañ bezañ "disheñvel". Mont a ra d'ober toenn an ti, an echuamant, ar gwareziñ, hag ivez ar reneveziñ. Dedennet eo gant ar breuriad. Diskouez a ra koll un trede bugel ne c'hall ket bezañ degaset cheñchamantoù talvoudus er vuhez, ur c'hloaz « vrasoc'h » eo evit ar vreudeur hag ar c'hoarezed.

Ar pevare bugel (4) zo e lignez ar bugel kentañ, hini an tad eta.

Ar pempvet bugel (5) zo e lignez an eil bugel, hini ar vamm eta.

Ar c'hwec'hvet bugel (6) zo e lignez an trede bugel, ur bugel eus ar cheñchament eo eta, ha kement zo...

Rankout a ra ar raktres-se chom da vezañ ur gartenn lenn gant doareoù a bep seurt ha n'eo ket un hentenn evit klozañ an dud.

⁽³⁵⁾ MILLER, Alice *"Notre corps ne ment jamais"* Embannadurioù Flammarion, Pariz, 2004, 192 pajenn.

Gantañ e c'haller kompren un toullad mat a ersavioù ha mont buanoc'h evit a sell ouzh anaout an hêrezhioù treuzremziadel.

Un trede tuadur treuzremziadel padus a zo pouezus da sellet outi : **dimeziñ a reer gant ur pried hag a zo e familh un adskeud eus e familh dezhañ pe dezhi** ⁽³⁶⁾ : ur seurt efed melezour, **kement-se en esper dieubiñ ar reizhiad.**

Pa lenner an holl skouerioù-se e c'haller en em c'houlenn war betra eo diazezet ar pezh a c'hallfe tremen evit diogeladurioù ha n'int nemet **martezeadennoù labour kadarnaet gant an disoc'hoù.** An disoc'hoù dreist-holl. Pa stader ar re-se e ouzer moarvat e oa ar gudenn-mañ-kudenn el lignez peogwir e ro tro ar saviad d'an dud ha d'ar reizhiad da bareañ pe d'en em santout gwelloc'h, dieubet diouzh ar pezh a skoilhe anezho. Kendalc'het e vez an enklask gant ar pal kompren gwelloc'h an argerzhioù hag o efedoù.

Evit klozañ, **ma'z eo arabat tremen hepken gant an denesadurioù psikologel** ⁽³⁷⁾ a-fet yec'hed ha dreist-holl a-fet kleñved e ro labour ar steredegoù ur chañs da nebeutañ da vont er-maez eus ar senarioioù a c'hwitadennoù, ur chañs da c'henel d'ar vuhez. Reiñ a ra ur chañs ivez **da virout ouzh e vugale da zougen kudennoù o zud-kozh hag ouzh e vugale-vihan da zougen e gudennoù dezhañ e-unan.**



Marie-Thérèse BAL-CRAQUIN zo Klañvdiourez Klinikourez Arbennigourez Klinikenn. Mestrez e Programmatur neuroyezhoniezh, stummet war ar bredelfennerezh, war an distenn dezrannañ, war an Dielfennañ Treuzgreadel, war ar Gelstat, war an Denesadur Poellel Fromel, war an Derapiezh reizhiadek hag ar fenomenologiezh treuzremziadel, kas a ra en-dro bodadoù studi evit adsavlec'hiañ an tiegezhioù hag an embregerezhioù abaoe ouzhpenn 10 vloaz e broioù a bep seurt en Europa.

War hec'h atiz, a-hend-all, eo bet krouet Klañvdiourezed Arbennigourezed Klinikenn e Frañs ha Prezidantez o C'hevredigezh e oa bet : Kevredigezh Frañs ar C'hlañvdiourezed Klinikourezed Arbennigourezed Klinikenoù ha Klinikourezed Kuzuliadourezed. Bez' eo ivez unan eus Diazezoù pennañ ar Skol-veur Brevez Europat e Skiankoù Klañvdiour, a oa bet lakaet Virginia Henderson da Brezidantez a enor anezhi. Renerez ar Skol-veur-se e oa bet e-pad ouzhenn ur c'hard kantved ha gervel a rae, evit Frañs, ar brezegennerien wellañ eus ar Bed e Skiantoù Klañvdiour. Mont a ra da bep lec'h ma vez 16 den da nebeutañ o c'houlenn outi mont evit ar steredegoù.

⁽³⁵⁾ CYRULNIK, Boris "*Les nourritures affectives*" Embannadurioù Odile Jacob, Pariz, 2000, 252 bajenn.

⁽³⁶⁾ SONTAG, Susan "*La maladie comme métaphore*" Embannadurioù Christian Bourgeois, Frañs, 2005, 111 pajenn.

Marie-Thérèse BAL-CRAQUIN

7, avenue Marcel Martinié

92170 VANVES

Pgz : 09 50 90 95 14

info@ulesi.fr

<http://www.marie-therese-bal-craquin.fr>

gwelloc'h eo kas posteloù eget pellgomz

Diverradur e 250 ger

Hep ma vefemp emouez ouzh an dra-se eo levezonet hor buhez gant santadurioù hag emzalc'hioù n'int ket deomp, rak liammet omp ouzh ar reizhiad tiegezhel gant sekredoù, gwallreuzioù, fealdedoù diemouez deuet eus an amzer dremenet. Azlammat a ra war an amzer vremañ, en ur wallstrafuilhañ anezhañ. Stourmoù, kleñvedoù grevus, drammgaezhiadezh, gwallzarvoudoù, emlazhoù, dis-hadennded, dispartioù, torradurioù micherel, c'hwitadennoù er skol, ha kement zo... a zistro hag a adkaver war meur a remziad abaoe pell. Evit mont er-maez eus an distroioù-se, pareañ e « wriziennoù tiegezhel », peoc'haat gant e hendadoù, e c'haller implijout meur a zenesadur, a vez displeget en danevell-mañ.

Evit ma vo kromprenus ha talvoudus d'ar selaourien interest an denesadurioù treuzremziadel, reizhadek ha fenomenologek hag ar pezh a zegasont da ziorroadur ar yec'hed, e vo diskouezet penaos e c'hall bezañ pouezus an doareoù treuzremziadel pa vez dalc'het kont anezho evit askavout ha diorren ar yec'hed diwar skouerioù fetis a-fet strafuilhoù ar yec'hed soñjet en o mentoù bio bred sokial speredel hag endroel. Roet e vo ar strategiezhioù a c'haller implijout da gompren, displeget e vo an disoc'hoù bet goude ar strolladoù terapiezh.

Soñjet e vo er faktorioù a laka da « gleñvel » hag an emelloù a "bare" ar reizhiadoù tiegezhezhioù, kumuniezhioù pe embregerezhioù. Kinniget e vo ar protokoloù prederioù a ro tro da adkavout ar yec'hed. Klasket e vo ivez gouzout penaos e c'hallor breutaat war ar stummañ war an hentennoù-se. Ha pledet e vo ivez gant priziañ an disoc'hoù.

Dasparzhet e vo testenn ar brezegenn.

Diverradur e 50 ger

Penaos e c'hall an nesadurioù reizhiadek, fenomenologek, treuzremziadel a-fet adsavlec'hiañ an tiegezhioù hag an embregerezhioù sikour da ziorren ar yec'hel hiniennel pe stroll ? Petra a laka ar reizhiadoù da gleñvel, petra a bare anezho ? Penaos ober, stummañ, priziañ ? Sed aze an danvez a vo pledet gantañ er brezegenn-mañ.

(37) CYRULNIK, Boris *"Les nourritures affectives"* Embannadurioù Odile Jacob, Pariz, 2000, 252 bajenn.

(38) SONTAG, Susan *"La maladie comme métaphore"* Embannadurioù Christian Bourgeois, Frañs, 2005, 111 pajenn.